

# AR VOTADEK

Disul e ma ar votadek,  
 Petra refomp-ni mignonet ?  
 Dirazomp er veac'h-ma zo tri.  
 Penaos e clefemp-ni voti ?  
 Tri, a yugale ann noblans,  
 A zo en dro-ma, pebeus chans  
 Evit Bretonet ar vro-ma.  
 Phini 'n tri-ze eo ar gwella ?

An duc DE FELTR, CHARLES DE GOYON,  
 A zo evit ann Napoleon ;  
 Ann Amiral de KERCEGU,  
 Gant Herri pemp zo a du ;  
 FOUGHER DE CAREIL, prefect coz,  
 Hennez zo wit difen hon c'haoz.  
 War c'hema 'ta elefemp voti,  
 Pa eo ar gwella euz ann tri.  
 Voti, eme darn, ne servij ket ;  
 Eo, kenvroiz ker, mignonet,  
 Mez voti ha voti a zo,  
 Hag 'vit en ober clask golo ;  
 Anaout voar biou eo e voter,  
 En kement-se man ann affer,  
 Rag war darn e c'halemp voti  
 A rofe deomp eun trostat fri.

E ma bepred beo n'hor c'halon  
 Ar sonj euz a Napoleon,  
 Euz pebin 'n Impalaerdel  
 Oa 'mezan ar peoc'h assurte.  
 Dezan neuze hon holl fizians  
 A rojomp holl hep resistans ;  
 Mez hen deomp en deus disket  
 Petra oa ann Impalaerdel.

**Crimé, Rom** hag an **Italie**,  
**Chin, Cochinchim** ha **Syrie**,  
**Mexik**, ar fleuren euz ann holl,  
**Sedau**, hep compta ar goal goll.  
**Deg milliard anter** dispiniet,  
**Tri c'hant mil maro, reou vleset** ;  
 Cetu frouce ann Napoleon ;  
 Pebeus burzud ! pebeus eston !

Ma ne oa ket prest hon arme,  
 Da biou oa ar faot euz a ze ?  
 Ne oa ket, vel zo lavaret,  
 Dre faot ar republikanet ;  
 Mez laket e oa ann are'hant  
 Da ober eun taol excellant :  
 Da ober brezel ar Mexik,  
 Eun affer kaer ha manifik  
 Hon mobilet iaouank ive  
 Eur miz bep blavez a gleie  
 Mont da ober ann exercis,  
 Evit hallout deski ar c'his

Env ann arme en peb doare.  
 Mez e'hoant voti a oa neuze,  
 Aonn a oa rag facha an holl,  
 Ar **vota** **IA** c'haje da goll.  
 Uguent vloa a prosperite !  
 A repet he vignonet bende,  
 A neus roet Napoleon  
 D'ar Fransijen he nation ;  
 Groet en deus hentchou houarn,  
 Enpad ma eo bet o c'houarn,  
 Coulsgonde kent neus bet renet,  
 En holl broiou euz ar bed.  
 Er Beljik, hag en Itali,  
 Er Suiss, er Spagn hag er Russi,  
 En Bro-Saos hag en Amerik  
 Zo hentchou houarn manifik.  
 Hag ama, goude oe tapet  
 En **Sedan** gan' ar Brussianet,  
 Ann hentchou houarn neus dalc'het  
 D'en em brosperi kaer meurbet.

Kement ha kement pa glasker  
 Brema zo daou vloa e kever  
 Ur profit a dri uguent million  
 Dreist comptchou an Napoleon,  
 Roet gant ann hentchou houarn,  
 A boe ne ma ket o c'houarn ;  
 Evel-se 'ta, mignonet.  
 Ar vapeur ia en dro bepret.  
 Hon gwin, hon ed hag hon aman,  
 A ouerzomp ive mad hep han ;  
 Aa 'vid ar pez sel hon loened,  
 Hep han ive e vent guerzed ;  
 Bep bloa anter-cant million,  
 A gousté deomp Napoleon.  
 A guezek daou c'hat anter-cant  
 Oa ezomp da zougen he arc'hant.

Bep bloa ar Fransijen dezan  
 A roe eur som evel heman.

Pa oa deud en Frans da ren,  
 C'hoec'h milliard a c'ble n'oa ken ;  
 Ha pa eo kouezet en Sedan,  
 Uguent n'eus lezet da bean.  
 Guezet en deus mad Bonapart  
 N'eo ket bet manket war he art.

Araog eru Napoleon,  
 Eur million a gontribution  
 A bea bep bla ar Fransijen ;  
 Hirie daou unan ouspen.  
 Chui pere o c'heus godellou  
 Guerniset mad euz a bejou,  
 Votet war eur Bonapart  
 Ne vanko ket war he art.

Cetu ar pez en deus deomp groet.  
Ha darn a c'hoanta lavaret  
E zeo darn he gonsellieren,  
Ne fiziet ket enne ho croc'hen ;  
He holl gonseil a choase  
Hag ar reman en trabisse ;  
Perag ne se gante a du  
ENN eil devez euz a guerdu.

Evidomp-ni hon daoulagad  
A gle beza digor mad ;  
Mar d'eo hen eo hon zromple :  
Pellaomp ouzimp be ligne ;  
Ha m'ar bca he gonsellieren,  
Tec'homp euz ann oll dreitourien :  
Bazaine, Routher ha compagni,  
Ha combatomp mab Eugeni.

Deomp-ni ann Napoleonet,  
A gle brema beza disket.  
Talvoudgez-peb hini ane,  
Bazaine, Sedan : Egalite.  
A rei deomp hol da gompreñ,  
Eo Napoleonet tromperien,  
Ha kement hini souten ane :  
Na votomp ket war ar reze.

Deomp, Napoleon kenta,  
En Waterloo, pe n'em drompla,  
E reas deomp koll ar Beljik,  
Ha provinsou all manifick.  
Napoleon trede hremant,  
Ann Alsas-Lorain, en Sedan,  
A neus groet deomp koll ive.  
Petra ne rai ket Pevare?

A bep tu adare brezel,  
Ha ma na gueromp ket divoel,  
Hon bro, p'hini eo ar gaera  
En touez holl broiou ar bed-ma,  
A vezo er fin partajet  
Gant Napoleon pevaret.  
Petra a erruo ? Done oar...  
Ho far nens ket war an douar.

**Kerjegu**, petra eo brema ?  
Eun den leal euz ar vro-ma ;  
Mez tremenet e n'amzer,  
En hon bro, Bretonet ker,  
En pehini ann **drapo gwen**  
A helfe en surete pourven ;  
Evel ne ma ket en hon bro  
Averri pemp war hon c'haiero.  
  
Kerjegu, mezan vo fidel  
Da Herri pemp bete mervel ;  
Mez daou-uguent vla neus servijet  
Dindan drapo tricoloret,  
Ha breman, hervez he lavar,  
En keit ma vo war an douar,  
Tricolor e vo e zrapo  
Hag Herri pemp a zervijo.

Penaos e vezo resevet  
Hema gaut Herri ar bempvet ;  
Herri biken na gouzanto  
Chanch eun neuden en he zrapo.  
Anu holl drapotou all en ludu,  
Memeus hini de Kerjegu ;  
Pa zeui ama Herri pempvet  
A zo zur da veza rentet.

De Kerjegu, pa voelo ze,  
No tricolor bet er c'ontre,  
A gemero an hini gwen :  
Ha gar deomp neuse Fransijen ;  
Sin ar veleien ann noblans  
Eo ann drapo gwen en Frans ;  
Ann deog hag ar preuveudi  
Taost da hema ma ho zi,

De Kerjegu deomp a roio  
Eur lienen vit hon zaolio ;  
Mez ar servieden-ze deomp  
A beafemp ker deus vo komt.  
Ann deog hac ar preuvendi,  
Brezel zur gant ann Itali :  
Ze a roi deomp **Herri** pempvet  
Diouallomp da veza tromplet.

**FOUCHER DE CAREIL** a zo bet  
En hon zonez-ni, Bretonned,  
Hag administret gant furnez  
Ann departamaut euz ho hiez.  
He volonté, en hon zonez-ni,  
Oa gallout sikour peb hini,  
Creski meurbet ar skolajou  
Difen skolaerien ar vro,

Re bir ve din lavaret  
Ann holl vad neus aman groet,  
Hag ar pez a c'hoanta brema  
Eo ar gouarnamant furra :  
**Peoc'h, honeste, tranquilité**  
Evit ma halfe hon c'ontre  
Sevel euz ar stad eo laket  
Gant an Napoleon trivet.

Conservatour eo, emezan,  
Ar pez signifi, dre aman,  
E viro ar gouarnamant zo,  
Ar Republik en hon bro.  
Evel se ta, ma mignonet,  
Holl evit an den-ma votet  
Hen eo ar gwella euz ann tri,  
Warman eo e kleet voti.  
  
Ar Republik, pevar bla zo,  
Eo gouarnamant hon bro.  
Peoc'h aboe hon deus-ni bed  
Hag hon holl draou mad zo ed.  
**Evel se ta, ma mignonet,**  
**Holl evit ann den ma votet**  
**Hen eo ar gwella euz an tri:**  
**Warman eo kleet voti.**